

DEZREVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

Met ne oa ket vakañsoù evit SKED !

Evit ar gentel vrezhoneg e oa kinniget deomp ul labour dre internet. Se zo un istor all !

Ne oa ket boazet an dud da labourat evel-se. Ret e oa kaout peadra evit ober kenstagadur (koneksioñ) dre internet er gêr.

War-lerc'h e oa ret heuliañ ar pezh a lâre ar c'helenner.

Ne oa ket aes evit an holl !

Farsus-tre e oa bet ar gentel ar sizhun tremenet.

Diaes e oa da dapout ar c'henstagadur gant tout an dud asambles.

Da skouer : me a wele Gérard met ne welen ket na Georges, na Pierre. Ne gleven ket mat Georges met e kleven Pierre ha Gérard. E-kreiz tout ne gleven ket ha ne welen ket den ebet ken!

Dre chañs e oa ur “chat” evit kaout darempred gant ar re all.

Ret e oa skrivañ evit heuliañ ar gentel met tout an dud n'o doa ket komprenet mat ar pezh a oa goulennet gant ar c'helenner.

